

Ton : *Bosen Elliant.*

**Diviz etre Blouz ha Chupen,  
Geïer zod ar goz-kaziken ;  
Aliou fur hep goapât tam  
Ha louzou mad ouz ar c'hontam.**

Ton : *Kelven, pe meur a hini all.*

1 — Bretoned, va c'henvroïz, estonet oun meurbed  
O velet hag o clevet, hag a dreuz hag a hed,  
Ar zotach hag ar geïer, couls hag an dromplerez,  
Gant an *electionou* skignet en ho touez.

2 — Mes ar pez a ra din poan, pa zeuan da zonjal,  
Ez eo guellet lod, siouaz, o trei var an tu fall,  
Hag ouспен o rei an dorn d'hon oll enebourien  
Pere a zo clask an dro d'hor checha er vouillen.

3 — Ar re-ze, va c'henvroïz, m'hen asur d'oc'h a-vad,  
Bep tro a ra goab ouzomp ; m'ho ped silaouit mad :  
« Dioded oump, emezho, n'oump 'med pennou azen ;  
« Caset e vimp da beuri pa c'h-lazo an dachen. »

4 — Ni na *ententomp* foeltr-vad demeurez ho skianchou,  
Cals re louz eo hon dillad, re bouner hor botou :  
« Ma vefe bet ar bourc'hiz, ken zod hag ar paizant,  
« Ar bed-ma c'hoaz a ve bet 'vel 'n he gommansamant! »

5 — Mes m'hen asur d'oc'h avad, e mare ar moueziou,  
Pa viot o comz outhe, vo mel en ho ginou :  
« Ar c'homzou flour, emezho, a blij da Ian baizant,  
« Tollit evez, Otrouien, pa 'n em gavo *prezant*. »

6 — « Oh ! lezit-hen ganin-me, a lavar *lip-he-stal*,  
« Mar 'n em gavan-me ganthan m'hel lakaï da zansal ,  
« Me a rei dezhan credi : beleïen ha noblanz  
« A zo oll, hirio an de clask caout he dam bevanz. »

7 — Setu ema digouezet devez ar marc'had braz  
Ha Couër ez a e ker, harpet var he ben-baz,  
Neuze Otrou *long-he-zun*, 'n eur fumi he gornad,  
P'en deuz guellet anezhan, a ra eur zerr-lagad.

AR BLOUZ.

8 — « Arsa ! eta, mignon Fanch, deut mad oc'h d'ar mar-  
« Mar or bize bet amzer, 'boa tapet eul lipad ; [c'had ;  
« Mes pa 'z omp en em gavet, evit troc'ha berroc'h,  
« Chilaouit an neventi am euz da gounta d'oc'h.

9 — « Ar veleïen, an noblanz 'glask sevel ho *droajou*,  
« Ama, gant an dra-ze c'hoaz, or bo *electionou* :  
« Ar re-ze a zo ato o clask poulsa ho fri...  
« E kement affer a zo e fell d'he commandi ! »

FANCH.

10 — « Electionou ! tan-frez ! avoalc'h zo bet dija ;  
« Rag gant ar re-ze seul-dol ar c'honvers a falla.  
« Guelloc'h e vize bet d'oc'h comz din euz eun dra all  
« Ha lezel ar moueziou-ze dont var ho c'hement-all.

AR BLOUZ.

11 — « Bah ! clevit eta, farsour, eun dra *interessant*,  
« Ar re-ze a zo breman clask chuna ar paizant ;  
« Fallout 'ra d'ar veleïen kerât ho oferen ;  
« D'an noblanz euz ho tanve caout an diou-drederen !

12 — Mar gellont sevel ho gar ha commandi er *gamp*,  
« Adieu 'vad d'ho peadra ! *ententit par examp* :  
« Pa vezo ho zroad er sklek, neuze vimp divezad  
« Dont d'en em lipât goude ! red eo dimp evesât.

13 — « Mes gant an diaoul ez iaïnt ! Beza ez euz eun all ;  
« Hag hema 'vit ar paizant, zur na vezo ket fall :  
« Lakat a raï convers-foll, distol var an taillou,  
« Pevar scoet eul liour amân hag eun dousen viou ! »

14 — Neuze *dilonker-geïer*, crog en he voustachou,  
A lavaro c'hoaz da Fanch : « Zell ouz ar gazetou...  
« Ha mar n'en d'eo ket guirion kement 'meuz discleriet,  
« Va fenn ran d'ober eur voull... gant ne vin ket gloaziet. »

15 — « Eun dro ra var he zeuliu, 'n eur denna beg he  
« Ar paizant, emezhan c'hoaz, zo zod da beuri ieot, [deod,  
« Red eo bouta 'n he spered evel gant eur forc'h houarn,  
« Claskomp ar gaou ar brasa da blanta en he scouarn.

AR BLOUZ.

16 — « Herri pemp ! ah farsour den, mignon ar veleien,  
« Mar e teuio var an tron, dek scoet an oferen !  
« Ho touar vo d'an noblans, c'hui a vo var ar plouz !...  
« Dizammet diouz ho madou... c'hui a vevo didrouz !...

17 — « Ha c'hoaz mar chomfe ganoc'h ar frouez euz ho  
[labour,  
« Mar vec'h zur 'vit ho pevanz da gaout bara ha dour !  
« Mes *deog* ar veleien, oll *guiriu* an noblanz,  
« A roi d'oc'h evit ho lod, *mizer* en *abondanz* !

18 — « C'hui gav mad eur bannejistr coulz hag eul lommig  
« Kaëra tra, bep an amzer, lipât bep a chopin... ! [guin ;  
« *Allaz* ! mar n'am c'hredit ket, *adieu* ! da bep *boesson*  
« Alc'huez an oll davarnou a vo gant ar *Person*... »

19. — Goude kement a c'heier 'vit trompla ar paizant,  
Rog ma tistroio d'ar gær en do c'hoaz eur prezant :  
Eul leorik a zo bet gret, impentet a zoare  
Ha skrivet oll pen-da-ben enep ar virione.

20. — Tromplet eo ar paour kez Fanch, kemer ra aneza.  
Eur prezant a c'hoaperez ! Countant eo memez tra ;  
Pinvidik 'n em gav ganthan evel gant eun tenzor ;  
Mes dre ma lenn anezhan he veg ha chom digor !

21. — Ne oar ket ar paour kez den pelec'h zo guirione ;  
N'euz nemed tenvalijen deuz ar pen d'egile,  
N'euz gir demeurez a Zoue nag euz he Varadoz  
Goude fin ar vuez-ma nitra ken da c'hortoz.

22. — Sclerijen a vank da Fanch, goasoc'h eo an danger,  
Rak contam zo el levr-ze ha lounket vo ember :  
Setu an diskiant paour zotret tre he galon  
Ha deuet tenval he benn gant he leor fals-mignon.

23. — O va faour-kez kenvroad, na dallet oc'h eta,  
Na vuelit ket kanaill ker 'n em glevet d'ho trompla ?  
N'oa ket troet mad ho kein pa oant oc'h ho koapad ;  
Taolet o deuz ho babouz beteg ho taoulagad !
24. — Diouallit mad, Bretoned, pa gafot eul leorik,  
Diamzaët gant an oll evel eur bastardik :  
Marteze en deuz vilim ha flemm ar serpanted,  
Pe zoken, glaouren fleriuz gouenn louz ar marmouzed.
25. — Potred ar Republik-ruz a glask ho touella ;  
An arc'hant eo ho Doue : ar frico ar guella,  
Amzer dibres, c'hoariou, ed ha kig marc'had-mad,  
Setu ho oll Baradoz, bepret ober chervad !
26. — Sonjit eta, labourer, en ho tam peadra,  
Mar ez a 'tre ho daouarn a vec'h po eun tanva ;  
He a zo clask ho chuna ha non paz an noblanz.  
Ah ! credomp d'hor belein hep aoun na difianz !
27. — Ar re-ma a brezeg d'imp lezen ar guir Doue ;  
He a zo he vinistred ha ni he vugale ;  
Hirio ministred Satan, ar ganfarted diroll  
A gar'fe dont d'ho discar ha commandi d'an oll.
28. — Doue a lavar d'imp-ni, dre vouez he Vinistred  
Pevare a ve geier ha pelec'h 've manket,  
Setu kenta pen-abek deus arraj an dud fall :  
He a garfe toll d'an traon kement 'zeu d'ho samall.
29. — Doue a lavar d'imp c'hoaz : C'hui garo ho nesa,  
Lezit ganthan he vadou, bezit mad evitha ;  
Na vezit ket den lubrik a gorf nag a spered,  
Displegit ho coustianz e skouarn va ministred.
30. — Meur a vour'hiz dilezen, dizoue ha den fall,  
Ha na gred mui ne ve den nag honest na leal ;  
A zav droug en he galon enep ar bugel-mad,  
Pa gri huel, harz ar bleiz, 'vit difenn he zavad.
31. — Setu ivez ar penn-kaoz euz arraj ha kounar  
Oll gornou-boud an Ifern hag a spount an douar.

Petra e claskont ato ? Heulia ho goall dechou  
Bete redek aliez var arbenn an ankou !

32. — *Blouz Scaër, kaziken Faouët ha karabouz Gourin,*  
E pep foar, e pep marc'had a zon ho zabourin  
Evit embann da Chupen, neventi *manifk* ;  
An euruzdet *souveren* da heul ho Republik ! !

AR BLOUZ.

33. — « D'an traon ! Ran plan, Ran plan, pan ! D'an  
[traon ar Veleien !  
« Cleo ! cleo ! neuze zur avad 'vo druoc'h hor zouben !  
« Dalchomp mad ! artizaned ! Dom Jackez ha Dom Ian  
« Na ententont ar foeltr-vad euz *droad* ar citoïan !

34 — « Pa vezimp-ni ar mistri, ni raï hervez hor c'hoant ;  
« Guelet skler a rit hirio, gantho 'ma an arc'hant.  
« N'em glevomp eta, keriz, da hada hor geier ;  
« Greomp goap euz Ian baïzant ken a c'hrevo he lerr !

MAB JILIK.

35. — Oh ! ia, da ! Citoïaned, 'm'oc'h ganimp zur da vad,  
Mes var ho kazikennou souden c'hui po renkad.  
Chui a lavar : Ian baïzant na gompren ar foeltr-tra !  
Mes me ho ped da lakât ho pez e plas he loa ! . . .

36. — Mar vefche ar baïzanted oll er zonz ganin-me,  
C'hui o pefe var ho fri lunedou a zoare ;  
Non pas eur re hir-velet, mes eur re verr-zellou  
Evit guelet ar c'haillar a zo diouz ho pragou !

37. — Kals guell e vize bet d'oc'h roï kentel var ar ru  
Etouez ar blouzou fall hag ar rochedou du,  
Pe c'hoaz renka he vouelen da Jakez *loung-ar-zoc'h*  
A zo eet breman e ker, da chom da blas-ar-moc'h.

38. — Pierr-Mari *Lip-he-Bao, François Gagn* ha *Louis*  
*Mibien* da *Charlik kao*, setu aze tri duïll : [Ruill,  
D'ar re-ze roït kentelliou ha lezit Ian baïzant ;  
Guelloc'h e kav beva zod ha mervel innosant.

39. — « Lennet am euz, gant zouez ha gant displijadur,  
« Ho koz-brezonnek guilgam laket en avantur ;  
« Rak ar sperejou dister, kerkouls hag ar re vraz,  
« Evit heulia ho lezen, renk kaout daoulagad kaz.

40. — « Lavaret a rit dimp brao beza leun a fianz  
« Ha zur gant ho principou e kavimp asuranz !  
« Hogen ! pe seurt asuranz, mar plij 'eta, Autrou,  
« Me gred oc'h evel d'omp-ni, kig, eskern ha bouellou.

41. — « Bourc'hiz kercouls ha paizant gant Doue zo  
« He lezen zantel hepken a dle an oll miret. [crouet ;  
« Ha c'hui glask hervez ho penn, gouarn hor c'halonou !  
« Foei ! me 'n em gav couls ha chui ! Chomit en ho pragou.

42. — « *Liberte* ! var ho meno, *liberte* da bep den  
« D'ober diouz he faltazi, setu ho oll *Lezen* .  
« Mes me a zonzj d'in, Otrou, zo 'voualc'h a *liberte*,  
« Pa ve lezet ar c'hristen da heuill lezen Doue.

43. — « Oll *liberte* da ruilla er fank hag er vouillen,  
« Setu petra sinifi ho *prinsip souveren* ;  
« Frankiz evidoc'h hepken, jenamant d'ar re-all,  
« En eul lakât ac'hanomp henvel ouz ar chatall !

44. — *Ingalited* a vo c'hoaz, hervez ho *prinsipou*,  
Peb unan eez a hello sevel barz ar *c'hargou*.  
Oh ! ia, siouaz ! guir eo se ; mes 'voualc'h a zo dija ;  
Rak bepred ar baizanted a renko ho fea !

45. — Ar rouaned, emoc'hu, a gouste kals re ger ;  
Hon *taillou* a dle distôl kaziamant an hanter !  
Mes pevare 'ta m'ho ped, vo distol varnezg ?  
Ben daou c'hant vloaz marteze, goude ma vimp maro !

46. — Ni a zo pennou kaled, clevit-mad, Otrouïen,  
Nemed nebeut ac'hanomp a heuillio ho lezen ;  
Ni a gred d'al *Liberte* roet gant hor Zalver,  
Ni 'gred d'an *Ingalited* laket gant hor C'hrouer.



47. — Servij Doue dreist an oll, setu hor mam-lezen ;  
Goude ni a blego d'oc'h, mar lezit ar c'hristen  
Da silaou he veleien, da heuill 'ho avizou ;  
Rak droad o deuz, couls ha c'hui, da roi oll ho moueziou.

48. — Amzao a rit oc'h unan n'or beuz ket sklerijen ;  
Neuze michanz e renkomp silaou hor beleien.  
Digantho a bers Doue ni glev bep guirionez ;  
Genoc'h, nemed tromplerez, gantho ar guir furnez.

49. — Lucifer eo tad ar gaou, c'hui eo he veleien,  
Dioanet en hon touez euz bro ar varmouzien :  
Laret 'ra ho *doctored* penoz ho kenta tad  
N'oa nemed eur *marmouz* koz hag en doa pevar droad !

50. — Evelse 'ta, lec'h avans, en dra-ma sonjit mad  
C'hui a zeu hirio adren peguir 'peuz 'med daou droad ;  
Ho tadou koz, respet d'oc'h, helle sevel var bâr  
Evit ober ho affer, peguir 'd'oa pider gar.

51. — N'ho d'oa ket ezom a vlouz, a roched na bragou ;  
Guisket ez oant kouls ha c'hui hep kement a vizou ;  
N'ho devoa ket a zispign gant *lagout* ha butun,  
Ha dibaod 'vizent guelet tam élanvoc'h euz al lun

52. — Lec'h sevel eta ho penn evel ma rit hiriou,  
C'hui a dlefe oll gant mez 'n em guza er c'hoajou,  
Ha heulia, er broïou goue, roudou ho tadou koz,  
Marteze arog mervel c'hui iei c'hoaz da *varmoz*.

53. — Breiziz, mar am c'hredit-me, roit evelse friad  
D'al lakijen divergond pa zeuont d'ho koapad.  
Laromp kren e vimp ato *Bretonet*, *kristenien*,  
Ha bugale da Adam ! D'an traon ar *Varmouzien* !



**KIMIAD.**

TON *Jenovefa*, pe eun all.

1 — Bouchizien honest euz ar c'heriou,  
Mar lennit ma c'hentelliou mad ;  
D'oc'h zur me na ran ket rebechou ;  
D'oc'h emoun eur mignon ervad.

2 — Mes ar ganaillez oll a bedon,  
Ken e ker ha ken var ar mez,  
Da glask barzed da c'hoari ouzon :  
Guelet a vo piou en do mez.

3 — Rak mar kendalc'han em zantimant,  
Mar na hellit ket ma zrec'hi ;  
Me a roi d'oc'h c'hoaz eur c'homplimant  
Hag a vo re bar d'ho hini.

4 — E lec'h ho kas da beuri glazen  
Me rai eur banket a zoare :  
Teodou muled ha dioukouarn azen ;  
Diouallit petra vo goude !

5 — Ian, mab Jilik a vaner Groac'h-Lan,  
Setu va hano patouillek,  
Guisket ato gant chupen lian,  
Ne ouzon nemed brezonek.

6 — Mes dre va feiz, va c'hreden guirion  
Me a zo bet ato douget  
Evit an dud a relijion  
Hag am eus a belzo karet.

7 — Me esper a zo eur vuez all,  
Me gred a zo eur baradoz,  
Evit recompans an dud leal,  
Hervez kreden ma zadou koz.

8 — Me gred zo ifern 'vit punisa  
Ar re dizuj ha revoltet,  
Ha ne glaskont ebars ar bed-ma  
Nemed heuil ho fennou kalet.